

KIS-665 – Stummoù reizhistorek ha form glasel

(GE da AM – 29 01 00)

[Notenn e sigur prientiñ eil embannadur *Gerioù evit komz brezhoneg bemdez* gant Alan MONFORT]

Evit d'ar brezhoneg bezañ bepred war ar stern, evel an holl yezhoù met muioc'h eget ar yezhoù all, ez eus ur brezhoneg klasel bet diazezet tamm ha tamm abaoe tri c'hantved a ya d'ober kraoñell ar yezh ha na c'haller ket kemmañ ken. Ar yezh klasel-se zo bet adeiladet a remziad da remziad diwar-bouez labour ar skrivagnerion, ar yezhadurourion hag ar c'heriadurourion. Evit a sell form ar gerioù ez eo bet startaet pep kammed dre ur geriadur : GREGOR en 18t, GONIDEG en 19t, VALLEE e derou an 20t, Roparz HEMON e-kreiz an 20t, geriadurioù *Preder* hiziv. Evit reolennoù ar c'hramadeg ez a un hil heñvel eus GREGOR da Roparz HEMON da c'hortoz ma vo roet form da c'hramadeg ar brezhoneg arnevez. Pep geriadur, pep gramadeg a verk un araokadenn dieiltro ; pep kammed eus ar yezh zo un eilsammadur eus ar c'hammedoù kent ; dre an eilsammadur-se e c'hoarvez d'ar yezh kemmañ, met bewech ma kemm ez eo etrezek brasoc'h galloud ha loazioù. Da skouer, VALLEE ha HEMON, dre gendeuziñ danvez o tont eus an holl rannyezhoù ha teodyezhoù ha, dre se, o tiazezañ ar yezh war he zremened, he dieube diouzh al lec'hiegezh hag he digore d' al lavar bed : ouzh an damant proviñsek kreizet war geñveriadur al leoneg '*yez*' hag ar c'herneveg '*langaj*' ez erlec'hient ur preder hollveziadek o lakae da gomz eus *yez* ha *lavar* en doare ma komz ar c'hallegerion eus *langue* ha *langage*, an alamanegerion eus *Sprache*, h.a. ha da luniañ gerioù evel *yezhoniezh*, *yezhouriezh*, *yezhelezh*, *yezhegezh*, *lavaroniezh*, h.a. n' o deus ket dre ret kevatalioù er yezhoù all. E gramadeg ar verb, ar saveladur gant SADED eus trevnad an orioù hag eus ar geveneped arc'hwelel etrezo a strishae da skouer arver an eilator d'an disveziadel hag a rae dilezel an arverioù all anezhañ, mar reizhistorek vent. Rak ur priz zo da baeañ evit ar glaselezh : etre aberzhoù all e tleer skarzhañ an daouarver ; ar geriadur klasel ne zegemer ket daou hanc'her peurheñvelster (daou c'her o doa an un ster e div rannyezh a vez degemeret gant digemmañ o sterioù, *komz* ha *prezeg* da skouer, pe dilezet e vez an eil, *langaj* da skouer, ha dalc'het egile, *yez*) ; er yezhadur, pa vez lies stumm evit an un arver e vez dibabet unan ha dilezet egile na pa ve hemañ reizhistorek : evit furmoù araogennel an

trede gour lies ez eo ken reizhistorek ar stummoù dre *-e* (*anezhe, dezhe*, h.a.) hag ar stummoù dre *-o* (*anezho, dezho*, h.a.) ha degemeret e voe an daou stumm zoken e 1941 ; meneget int o daou e GIBR., hogen n'eus bet dalc'het nemet ar stummoù dre *-o* e gramadegoù an hil klasel abaoe GREGOR. Skrivagnerion damantet d' ar yezhoniezh evel Goulven PENNAOD ha Turiaw AR MENTEG a blij dezho arverañ hevelep stummoù reizh e-keñver istor ar yezh met bet dilezet gant ar yezh klasel. E-barzh *Lavar* e toujomp peurliesañ d' o boazioù, met en ul levr kelenn evel da hini e ve ur fazi reiñ stummoù disheñvel diouzh stummoù ar yezh klasel. Setu perak e kav dimp e vo gwell distreiñ, e' z levr, d'ar stummoù dre *-o*.

(AM da GE – 13 02 00)

Diouzh 'm eus komprenet e kejfed gant *anezho* e Bro Leon hepken, *anezhe* a vefe lavaret el lec'hioù all. Neuze e komprenan perak e vez gwelet, gant tud 'zo, ar yezh klasel evel « leoneg ha pik ». Evit unan n'en deus ket studiet don ar yezh klasel e vez meizet hi evel yezh ar “beñseourion”. « Er yezh klasel n' eus gwenedeg ebet » 'm eus klevet. Moarvat e fazian met e ve degemeret aesoc'h ar yezh klasel ma ne ve ket gwelet evel yezh ur rannvro hepken. Ha gant gerioù — an araogennoù — implijet ken alies, n'eo ket anat.

(GE da AM – 17 02 00)

Kevret e kavi div gartenn eus an *Atlas linguistique de Basse-Bretagne* hag e weli *a*) war ar gartenn A EUX ne glote ket strizh ar stummoù dre *-o* gant bevennoù eskopti Leon ; e henvrezhoneg e oant ivez dre *-o*, hag e krennvrezhoneg pa groge diskar ar yezh e kaved an daou stumm *-e* hag *-o* ; *b*) war ar gartenn AUJOURD'HUI ne gaver ket stummoù *hiziv* er Gwalarn, er Gevred ne lavaran ket — a du 'rall krouerion ar yezh unvan a zalc'he kont eus krBr. *hiziu* ha Kb. *heddiw* evit ober an dibab a-douez bruzun an teodyezhoù. Tud 'zo, a lavarez, hag int dizesk, a ouzhpennan, a wel ar yezh klasel evel « leoneg ha pik ». Ar yezh klasel zo eskoret e-doug an tri c'hantved tremenet diouzh labour krouiñ skrivagnerion ha yezhourion a dape danvez a-lec'h ma kavent : henyezh, krennyezh, kembraeg, romanegoù, galleg ha dreist-holl oberoù ar grouerion all kent ha kempred, met pezh a vern hag a chom bev eo an oberoù o deus savet hag an hini pouezusañ dimp eo ar yezh unvan ; n'eo ket an doare m' he gwel tud 'zo (ha krouerion int ?) a gemm netra enni. Ha ne gav ket dit ez eus gwell d'ober eget magañ ur gorial kanton ha leurrenañ un emgann tasmantoù isrannvroel ? Hon istor

bremañ hon eus d'ober, n'eo ket an istor tremenet hon eus da adober ! Se lavaret, marteze ez an re bell o c'houlenn ma ve skarzhet dilerc'hioù an tremened — o tiwarañ ar vazh en he gwaran war an tu kontrol. N'eo ket an traoù o tont eus an tremened hon eus da zilezel met ar sell o doa warno tud an tremened. Na ziwelomp ket un dra : tud an tremened n'o doa ket kemeret an hent mat, hag en o gwall e ve pe get, p' o deus kaset o yezh da rannyezhoù, a rannyezhoù da deodyezhoùigoù hag a deodyezhoùigoù da netra. Hon c'hentañ preder eo diwall a vont gant an hevelep hent hag int.